


MESAEREZ AR MENE 46

Tempo di marcio. (♩ = 112.)



Ouz troad ar me - ne e sav drant, Ouz troad ar



me - ne e sav drant Lo - chen-nig plouz ma



dou - sig koant, Dou-sat eo ar ga - ran - te! Da



veu - li e - du - di bem - de, Ka - nomp gel

Ouz troad ar mene, e sav drant (fiou wech)
Lochen-nig plouz ma dousig koant,

Diskan:

Dou-sat eo ar garante?
Da veuli he dadi bemde,
Kanomp gel

'N eul lec'hig koant, flour ha didrouz,
'Lec'h ma kan noz de al lapouz,

Bemde, war ar roz alaouret,
E'h a da vesa he denved.

El lanneg-ze, envor dousan!...
E welis anei da gentan.

Un heol hanv a hare skedus,
E a valce hünvredis,

Pa glevis eur vouezig laoueh,
O tiston seder en draouenien.

Mouez sklintin eur vesaerezig
Ken tener evl he zonig;

Hag er roz, touez ar bleun melen,
'Welis o lintran he houef gwen.

« O plac'hig, kanet e'hoaz, m'ho ped;
Ho tiskan a zo kaer meurbed;

Ho son tener hag ho mouezig
A ra tridal ma c'halonig!

O ruian, ar vesaerezig
A blegou he zellou doanik,

He dremm oa dous, he bleo melen
A glaouiere war he zal gwen...

'N hon c'hichen eun evn a gane,
Ha dre e zon e lavare:

Me ive, gantan goneet,
A laras d'ar plac'hig karet:

Kompren a reas ac'hanon:
Bremen, kevred, kan hon c'halon:

Nag e vemp disterik ha paour,
Evrusted zo gwell 'vit aour!

'N hon zi bikan, skepd ar mene,
Ni vevo drant gant gras Doue.

Ni vevo seder, da e'hortoz
Mont da ganan d'ar baradoz.